

W.D. KER'N

E PEB TOURIST UR FLIK !

EN FAIT Y'A PAS
AUTANT D'AUTONOMISTES
QU'ON LE DIT

J'AI RIEN CONTRE LES
BRETONS, J'AI VOTÉ
LE PEN AUX DERNIERES
ELECTIONS

ICI U.D.R. C'EST U.D.B.

PAS JU W JEUNE
PARLER BRETON

Y'A MOINS D'ARABES ICI
QU'AILLEURS

D'AILLEURS J'AI
MIS UN BZH
SUR MA BAGNOLE

Y'A DU PASTIS
DANS LES BISTROTS

...VOICI EN DIRECT
COMMENTÉ PAR ROBERT BOLON
L'ARRIVÉE DE LA QUINZIÈME
ETAPE DU TOUR DE FRANCE
LUCNON-SUPERBANNIÈRE
TOUR DE FRANCE ORGANISÉ
PAR L'ÉQUIPE ET LE MAÏSIEUX
LIBÈRE A VOUS ROBERT
BOLON...

niv 10

2 lur




Pedet omp bet da gemer perzh en un abadenñ toullkuzh a zo bet aozet evit hor breizh plijadur, gant an EDF, ar C.E.A. hag ar gouarnamant. Kroget eo bet al lodenn gentañ n'eo ket pell, e-barzh Phogoff.

- Setu roll ar prizioù :
- kontañ priz : ar santrel nukleel
 - eil priz : ar c'homisariat erit difenn ar santrel
 - trede priz : un c'hazarn C.R.S.ed erit difenn ar c'homisariat.
 - pevarvet priz : un bordel erit ar cased
 - pempvet priz : mil kesad kranked mero
 - c'hwec'hvet priz : un ospital gant spesialisted war ar c'hign bew.
 - seizhvet priz : un plas konsiaj

Er fin, sapa programm kwa!
 Ha setu breizh ar reolennoù :

- 1) an aotrou maer en deus ar gwiz da serl "arekou municipal" erit mizout ouz ar c'hirri samm mont tre betek an aod.
- 2) Ar prefet en deus ar gwiz da serl "arekou prefektoral" a evp re ar maer.





- 3) ar gwiz en deus ar bobl da zibab
- 4) Ar gwiz en deus ar gouarnamant, ar C.E.A. hag an EDF d'ober goap eus ar bobl
- 5) Samet 'n dije en F.L.B ar gwiz da lakaat tout an holl da dezhañ
Plijadur d'an holl!



Diouenn a ra an doue
 damp. lod'n dud oant ket,
 gouest kent da walhin o dilhad.
 Kavet o deus gwelloc'h mont nac'h
 eget dougen dilhad leus.

Keep Brittany clean!

CHAL·HA·DICHAL



BULLOZ

ai kan get noo
satisfakchion



NE CHOMIN KET DA
VOUGAÑ E KAC'HAR
AL LABOUR NAGE
KAMBR KLOZ VA
EILPENN ALOUBET







PET
KWECH
NAM EUS
DISLONKET
EVAD AR
GELTED
KOZH!





TEUL GWIR-RIK :
 AR C'HARDINAL DANIELOU E
 PARDON ST. ERWAN-LANDREGER-
 DAOU ZEVEZH ARAOK E VARO .

STAGADENN
 D'AN TALBENN :
 ... HA
FALTAZI .




La grève interdite les week-ends et
jours de fête décide le gouvernement



UN ISTOR FENTUS EVID
TUD SPEREDOK

PESEJAT ANO N'EUS HO
KI ?




MA C'HI ? AVEL !






na nōg



BIKINI




DIKINI

baradoz ar yaouankiz
 ha prajoù ar manitou
 freuzet
 gand
 binvioù
 an ifern
 kevredigezhel



HIROSHIMA
 PORZHMoger



TÍR NA NŌG MA REOR

DAOST HAG E C'HELL
 BREIZH DEVAÑ DIEUB ?
 PE
 DAOST HAG E C'HELLAN
 ME DEVAÑ DIEUB ?

FRANKIZ OÙ ?

AOTROU :

PETRA EO AN ISTOR SE (BUHEZ) A GAVAN E-BARZH
YOD-KERCH . NE GOMPRENAN NETRA ENNAÑ.
MA KENDAL'CH E GIZ-SE NE C'HELLIN MUI
LAKAAT AR GELAOUENN-SE ETRE DAOUARN
VA MERCH . MARPLIJ, KINNIGIT DEOMP ETA

ISTORIOÙ DEREAT HA KOMPRENUS .

ITRON MAÏA HANTREOST - LANRIVOARE

ITRON GER : KINNIG A REOMP DEOCH'HA AMAŃ
UN ISTOR GAER A C'HELLFET KONTAÑ D'HO
MERCHIG ARAOK MA VANTE KOUSKET .

ISTOR VERR EVID MERCH'ED FUR

KERZH DA SUTAL BRULU WAR
AR MENE-BRE



DAW DEI



N'ON KET
G-WALL BELL
KEN



BRULU !

JOA

HA
PRESPOLITE



BRUDEREZH

FEST-NOZ

GAND

AR VREUDEUR DAL 'TA

CHEURC'H SIL

EIZH HA NAV EUR

STAL LIN

ha

GWELLAÑ KANNERIEN


HA SONNERIEN AR VRO

KANN 'VO HA
SONNAÑ REI
DEOMP



AR ZERVIJOUREZED
VO NOAZH -PILH !

PLIJADUR 'VO
KWIDA







KOUSK KOUSSK BREIZH-IZEL



E KONDON AN NOZ E TARZHO AN HEOL DU



teuzomp hor c'horfou e kalir ar vuhet



**GENEL HA MERVEL
DIBAQUEZ**



EZHALI
Y.B. KADEN 26

Lan-Delo, Lan benniget, tro-war-dro, hed kant lew,
Ne gredon ket 've kavet ploue ken koant ken bew !
'Vid skoachañ tud vad, ez out bet kuzhet 'goueled Breizh.
Warnout e skulh ar Peurvoud e venozioù a-leizh.

War benn an turier douar, lirzhin, hegar e par
Heol gwer, peurlviall klouar, hag eñ, d'ar c'houer, a lar :
"Chez war frank da drevellif gant da varc'h ha da gi,
Hag heb "mond re strizh ganti" dindan soul da gozh ti !

Du-se ne c'hoñll den mervel na zoken tec'hel pell
Evid kuitaad ar c'havell ha mond d'ar c'hêrioù 'drell
Da glask plijadurezhioù e-mesk tud a beb liw
Hag hec'h heñchfe d'ar galloù aliesoc'h 'ged e-biou.

Pa skollh karrig an Ankou gant re samm (mad ha fall)
E gar an eneoù, 'wechoù, lec'h nijal d'ar bed all,
Dond en-dro d'e zi kolo. Neuze 'tlaer, heb aon,
Geñll dirag spes ar marw : Petra 'glaskez Anaon ?

'Vel-se henvarzhed vrudet hon darempred bepred
'Vid troadañ 'barzh hor spered hengounioù kàer meurbet
Ha derc'hel yac'h war ar maez ar Vro gozh, he yezh kaezh
En desped da dud diaes, alies tud al lez.

Karoud a ran kanveulif va farrez, Breizh a-bezh,
Din e plij e c'haniri, ha kanañ 'ran, heb maez,
Senioù brezhoneg, gærzioù fardet gant hon zud kozh
Diñar-benn hon henvoazioù, traezh ar mor, brug ar roz.

Pegen rust e vez tonkad ar bugel reizh ha mad
Pa vez red dezhañ kuitaad Breizh-lzel, mame ha tad
'Vid mond, gwall-bell, da blegañ, 'wechoù heb kenavo,
Alies 'vid kaoud petra nemed klefved ar vro !

E-barzh broioù pinvidig 'm eus kavet nemed rin.
A-ls heol gor an Afrig, ne blije netra din.
Ha ee 'is, da vouskanañ hirvoudoù "Chateaubriand"
Hogen, staezh da rivañ 'z eo bihan-tre va skiant.

----- NIKVUUUU -----

Em c'halon, nag a gounioù kuffivig !
Holl ez int eus va c'hêr genidig.
Ma c'hoar, deizioù Breizh 'oa braw, braw
ha klouarig
Karoud 'ran Landelo ma bro
ataw !

Eus hor mame gaezh, koun ac'h eus, Marjan
En he c'hoazez dirag tan balan ?
Ni, war he barlenn, evel-hen,
heb ehan,
Beka dezhi war he blew geann,
Laouen !

Koun ac'h eus, ma c'hoar, eus an Drinded
Hag eus ar c'halvar 'kreiz ar Vered ?
Lar din ped gaezh ar "bign-ha-baon"
'e eus brallet
Pe, staezh ! Tintet d'an Anaon
Laz-kaon ?

Gaeloud a ray c'hoazh ma daoulagad
Ti bihan ma zad 'kreiz an Argoad ?
Ha bez va mame na 'z eo bet daw
Din kuitaad ?
Karoud a rin va Breizh ataw
Tan braw !

Mignoned, evel ataw, heol gor a zegas glaw
Ha neb a ver mad ha braw a chaoko c'hweg ha mao.
Va mennad, kêrañ mennad ! Deut eo da Wir avad :
Sell dirag ma daoulagad, Landelo ha tud vad.

Klevoud a ran o vrallañ, o vrudañ lid moarvad,
Ar c'hloc'h brasañ, Yvona, ur filhorez d'am zad.
Evel gaechall e melan, 'ziwar dreuzioù ar gêr
Brulu ar roz, bleuñv balan skeudennet 'barzh ar stêr.

Tezoù-hin brein ha drantus 'm eus laosket dreviv va c'heñ.
Hirnez, doan, boued divagus 'zo chomet ouzh an drein.
Felloud a ra din, a-vremañ, gonid war zouar Vreizh.
Sevel bugale awañ, n'eus neilec'h brawoc'h naizh.

Kavet on bet e Landelo
E-tro ma nij ar c'hwil-dorw
Deut heb tad na mame e glevan
Me a zo mab din va-unan
Ha lasanwet Kerloup-Bihan

2

Kresket em eus ur pennti
Dindan va zokenn e-mesk pri
Mec'hteg d'eizh vloaz, soñj am eus
E durien boued gant ul loa veuz
Soubenn "Trizrañg" gwellañ meuz ?

3

Etre din c'holc'hed, leun a c'hwen,
Ar rogn a gigne va c'hroc'hen.
Va zred noazh na oant ket tener.
Piv en defe koulz botoù-ler
Da gas ar saout d'ar parkeier ?

4

D'am fask kentañ em boa bet youd
Ha me da vevañ par d'an toud :
Heb kredo na pater noster,
Beb sul e vijen paotr ar gêr
En desped da glaz ar c'hleier.

5

D'ugent vloaz, balc'h evel ar maout,
E zougen manegoù kaoc'h saout
A-ls ur jiletenn re verr
E heole va c'horf diglinkl kàer :
Pe seurt pabor war al leurgêr ?

6

D'am zro soudard e Kêr Vacon
Nigozh a raed ac'hanon
"Les pommes de terre pour les cochons"
Les épiluchur' pour les Bretons"
Bekas, Bekasin, Bekas on !

7

Voilà, me lak ur yezh nevez
E-ser dibluskañ patatez.
Foi ! Bremañ ez on re zesket
Da zistreiñ d'ar vro gozh "si bête"
E-lec'h n'em bo koantenn ebet.

8

Fañch Kerdiaes, klaskit re all
Da charread e hentoù dall
E Pariz, em eus "chapeau mou",
Un toull buoc'h e-barzh va bragoù
Me "a ra du" gant boued aotrou.

9

Me n'ouzon mui kalz brezhoneg
'Hed an deiz e zrailhan galleg
A-benn ma zistrey ar rastell
Ouzh va fri ruz, gast ! a vo pell
Ha kenavo da Vreizh-lzel !

10

Va gwreg a zo ur strakell vraw
Kavet ganin er jabadao
E pelec'h ? N'oufen ket anzaw
Eno ne boan den eus e sav
Evelkent e vez bec'h ataw.

11

Lod a lavar ez on dogan
Ne ran ket forzh : Bevomp diboan !
Ne savan ket a vugale
Da gaoud amzer dond d'ar c'hafe
Me ra va zargazh evel-se.

12

N'eus gororer sur e Pigañ
A gement a vev ken dichal !
Pa vin intañv em bo ped all !
Pa vin kozh 'z in d'an ospital
E-lec'h n'eus ket saout da ziwall.

13

Ar Republik a vag gagnoù
D'ober petra 'leizh ar c'hêrioù ?
Hag a laosk an dud paour war-maez
D'en em wiañ e-mesk lastez :
An Diren a goll Frañs a-bezh !

YOD - KERCH Niverenn 10
Embannet gant
KORZ HAG ARZ BREIZHEK
d'ener : Tudy HUON.
Moulet e Copie 22
Pederneq
800 Skwerenn
Diskleriet hervez lezenn
eil trimiziñad 1976.
Niv. CPPAP 56577

ton : O kutuilh "Daoulagad ar Werc'hez"

(Barr ?)
 Pevar gloc'h, en un tour uhel,
 A strew, war roudoù an avel,
 B -levenez mil dafvad gredus
 Dirag relegoù burzhudus !
 Gweloud a ran - c'hoazh sonn e benn -
 Va zad, kozh dindan e vlew gwenn !
 Dide Bolazeg kenavo !
 Gwir-Gilhog a zo distro d'e vro.

Diskan

O Rozenn goant, koant ar Menez,
 Dalc'h koun ouzh ar paourkaezh Herri
 Chadenn guñv hor c'harantez
 N'hell na diskoulmañ na terrif.

2

C'hwi, va zad kaezh, te, va c'hoar vad,
 Lirzhin, e c'hoarzh ho taoulagad
 Rag pardon Sant Telo, (ken kàer all!)
 A lak hon eneoù da zridal !
 Ha, braw, va fluenn awenus
 A stummo sonioù dudius !
 Dide Bolazeg kenavo !
 Deomp holl da bardon Landelo !

3

Rag, du-hont tre war lein Are
 Ez eo chomet va c'hoant din-me :
 An Doukenn, koantoc'h eged un ael,
 ... 'Eo c'hwekañ plac'h e Breizh-lzel !
 Dindan he c'hoef he mouchouer
 He farez neblec'h ne weler !
 Kenavo 'ta va Zoukenn Vraw
 Karantez 'bo 'vidout ataw.

4

Leizh straed ar vourc'h, re strizh hiziv
 War ur palenn bleuñv a beb liw
 E gerzh lidambroug "ar relegoù"
 Dindan ur volz a gitoniou
 Nag a verc'hed mistr ha flourig
 A vourc'hoarzh ouzhin ken drantig,
 Dide Bolazeg kenavo !
 Pegen kàer ... pardon Landelo !

5

'Nañg a zo koant ha pinvidig ;
 Terez, dafseroz ha lalig,
 Ped-all a zo gouest (O ! m'hen toufe !)
 D'ober d'ur c'hloareg terrif le !
 Koulskoude nikun anezho
 War va feiz, ne gav braw an dro
 Da beurdouellañ va c'halon baour !
 Nikun na frealzo Beg-gaour !

Ar c'hanaouennoù a lenner amañ
 'zo bet savet gant GWIR-GILHOG
 etre 1908 ha 1911, ha das-
 tumet int bet n'eus ket ken
 pell-se barzh ar Menez.

Per Delo eo va anv ha filhor on d'ar sant.
 Ne zisplegan ket gevier evid jistr nag arc'hant.
 Rag n'on ket strobinieller ha d'ar Wif em eus kred :
 Ar wirionez a zispleg ; est a die ren ar bed.

Va fàeron, eskob Landaf, genidig eus Kembre
 En deus tremenet seizh vloaz ganeomp e-barzh Kerne
 O prozeg Aviel Jezuz, lezenn ar Garantez :
 "Karit, c'hwi a vo karet" a lavare bemdez.

"Karit an dud, al loened, karit pezh a zo braw.
 "Hag implijit ho taouzorn d'ober ar vad ataw.
 "Trevellit, kemerit poan da c'honid ho para.
 "Peb den a die kaoud e di hag ennañ peadra.

"Galloud an Tad a zo bras, brasoc'h e vadelezh !
 "Plijadurioù an douar n'int ket re an aelez.
 "An eneoù a dreuzvev dreist trubuilhoù ar bed-mañ
 "Hag eürus an Anaon vad a sach Doue dezhañ.

Ar Peürvoud karantezus puilh a skuilh e venoz
 "Ha, gant ur furnez estlamm eo graet ar baradoz.
 "N'e deus ket graet gant mein-dailh, gant aour na gant arc'hant
 "N'eo na voulouz na perlez na kennebeud diamant.

"An doenn a zo Ingalded al leur-zi Librentez
 "Hag an norioù Lealded, an alc'houez karantez.
 "Kredif a ran, va breudeur. Ya, setu va menoz :
 "Dre Lealded ez aimp sur, un deiz, d'ar Baradoz.

"Evid kaoud al Librentez, bevañ gant an aelez.
 "Lenomp merk ar Garantez engravet en alc'houez
 "Rag poan am eus o kredif ez eo Per alc'houeder
 "Da beb den eo, war zouar, an alc'houez-se d'ober."

Ar sant a ginnig ober braw hor silvidigezh
 A die goude prezeg mad, poaniañ, par d'ar paourkaezh.
 Va fàeron, skouer d'ar blenier, war-lerc'h an oferenn
 Ne goll ket e amzer evel hor beleien.

An trenkezennoù a vo gant ijin emvodet
 Ha liorzhoù Landelo dre-holl a vo brudet
 Da Liny da Lanzigned eo d'e drugarekaad
 Da gaoud betek meurlarjez avaloù "Delo mad".

D'an ampoent-se, va zud vad, e stager ar baotred
 Ouzh an arar soc'h ivin - e-lec'h stagañ loened.
 Dizro diouzh Jeruzalem, ar sant a embannas :
 "Ur marc'h a-raog an arar a vo re da bemp gwaz".

En eñvor a sant Sylvestr - Ur pab nevez beziet -
 An Eskob, e-tal andon burzhudus ar sklaerded
 A zifraostas prim ul "Lan" anwet eo Lanzigned
 Deomp da bedif sant Sylvestr da Chapel an Drinded.

Dellezus eo louzaouif hag embregañ kezeg
 Med ar sant a fell dezhañ bezañ gwellañ beleg
 Dienez ar paour, evitañ, a zo un debr-spered
 E gerent nobl a waske kalz sklavourien bepred.

D'amanzer-se, war Gerne, spontus e oa mervent
 Diouzh Daoulaz da Blogoneg, ar sant a faoute hent.
 An neb en doa kred dezhañ a gave ar yec'hed.
 Nann, ne vo gwelet, neblec'h, ur mezeg ken brudet.

Beskont Kerne, niz ar sant a zo kristen klouar
 Diouzh Bro-C'hall eo genidig kizioù Breizh tamm ne gar.
 Plouezidi an Noeneg a zo nasket berr, berr
 Hag e eontr a zo laket falloc'h eged ul làer.

(Per Delo)

Daoust ha n'eo ket bet gwelet gant an holl, ar Beskont
O isal kon droug ar bleizi : "kis ! kis ! war-lerc'h an eontr
Ken ma voe bet red d'ar sant pignad 'barzh an derwenn :
Ar pinvidig didalvez ne vo morse kristen.

Ar c'hlofved en deus lammet dreist treuzioù ar C'hastell :
D'ar c'huzh-heol "mab ar yar wenn" a gan heb stlak-askell.
Ar big war hent an Ankou a gerzh en ur rodal
Un euzh eo klevoud ar c'hi war al leur o youdal.

Hag ar Beskont da vousklemm : " 'Vin ket Kont e Kerne...
Mamm, lakit war va guele, va daez ha va c'hleze."
"Da gas karrig an Ankou pell, pell da wigourif
"En hon Doue ! me garfe gweloud va breur en ti."

War e glud, ar Gwir-Gilhog a gan skilltr : "Me a oar !
"Er porzh tri varc'hegour nobl a daol troad d'an douar.
"An tri varc'hegour nobl-mañ eo kerent ar Beskont :
"E dad, an aotrou koshañ... Salo-kras aotrou Kont !

"Me a oar ! a gan ar c'hog ur wech all war e glud -
"Noblañs ar c'hastell a zo e spi eus ur burzhud...
"E-kichen ur feunteun-lap, e Dineol pe war-dro
"Ur c'haro a zaoulamm-lamm, war e gain St Telo."

Deg lew en diw-eur amzer en deus graet ar c'haro
Hag, evid an deirved gwech ar Wir-Gog a gano
Pa lakay ar sant brudet e droad war an treuzioù
En ur lavaroud : "Va c'hoar, savit ho hirvoudoù !"

- "O va henvreur benniget ! d'am mab roit ar yec'hed
"Hag en-dro d'ar c'hastell-mañ, ne vo mui den nasket."
Kerkent e sav ar Beskont, yac'h-pesk evel biskoazh !
Med ar C'hont-kozh a lavar : "Telo, selaouit c'hoazh !

"An holl a vo disklavet - sed un dra vad touet -
En ur c'helc'h hag a pezo, war ho karo, treset.
Da hanternoz it war-raog, redit, dormit douar
Med dizroit d'ar c'hastell pa gano mab ar yar."

Ar sant, heb dibr na stleugoù, diouzhtu war e garo,
A zaoulamm d'ar peniti e-kichen Pratulo.
Eno, beteg hanternoz da bedif e chomo.
War plij gant Doue, warc'hoazh, e vo frank "Lan-Delo".

Goude taol an hanternoz 'vo sul ar vadeziant
- Ur gouel douellus meurbet da reif parroz d'ur sant ! -
Hemañ a heulio ar stêr beteg Roz ar gaouenn.
E Lan-Lorc'h ez eo erru pa darzh an arneuenn.

Stivell veur an oabl a zo gant Taran distanket
An teuztoù, war an douar, a zo dichadennet
E Kastell-Gall, an Noblañs ne vev ket direbech
Hag e c'hoar a c'hoall ar sant, gant truez, c'hoazh ur wech.

Markiz Lerran, floc'h leal, a lavar d'an Itron :
"Ma 'z eus riskl evid ho preur pe m'hoc'h eus margalon ;
Mab ar yar a zo ganin (ar c'hejer holl a garl
War an trankoed, a-us tan, heb aon araog Taran...)

Telo, heb un neudenn sec'h hag ar c'haro forbu
A zo dirag roudouz Aon pa gan mab ar yar zu.
An Eskob, kerse gantañ, a zistro d'ar c'hastell :
Tamm ebet diouzh ar Poher ne vezo distrobell !

Un hanter kelc'h ne vo ken parrezig Landelo
Rag war-zouar-berz Aez biken "Lan" ne vezo.
Med siwazh ! hor sant' pàeron, gwall abred a derc'ho
Ha 'z'war-se, nec'het holl, e zefved a glemmo !

Abaoc pemzeg kant vloaz, eo marw Sant Telo,
An adreizhour holl vrudet e pevar c'horn ar vro ;
Abaoc pemzeg kant vloaz, da suj ar Vadeziant ;
Kristenien vad ar barroz a heuilh pardon o sant.

N'em eus ket gwelet neblec'h ur gouel ken esmaeus.
O bobl drant, brallit skilltr a-us tud ken gredus ! :
Mil den, war gorre o roched hag ouzhpenn diarc'hen,
A ro "tro ar relegoù" gant peb a c'houlouenn.

Defved ar sant benniget, o kanañ meuleudi
A gerzh gant birvidigezh war roudoù an hini
En doe torret o chadenn, a gredient da viken
O Sant Telo, goallit deomp yec'hed ha bara gwenn.

Pardonerien Sant Telo, war-lerc'h e relegoù
A ra un dro a bemp lew dond war-eeun d'an neñvoù !
Echu va c'hàerañ marvailh. Trugarez selaouer !
Ha ma n'hoc'h eus ket kred din, it da weloud an Toer.

JAKEZ AN TOER :

Mechañs eo kàer marvailhoù va c'heneil Per Delo
Hag e bàeron a zo bet madoberour hor bro
Med ar sant a zo marw ha ni a ray lvez
Ha gant an tager hebken beudez a zo larjez.

TINIG AR BOD-LANN

2

Me a gerzh ouesk ha laouen
War hent Landelo !
Sell, dirazon Pont-Trifenn
Stêr-Aon, Pratulo !
Ha sell amañ skañv he zroad
Bleuñvenn ar Bod-Lann
O teredeg diouzh ar c'head !
Va c'halon a gan !

E-mesk al lus, adarre
Deomp Tin, dizale
Da zizoleif hon ene
An eil d'egile
E-harz Aon - Koun az pefe ? -
Tinig, arlene
D'ar bemzeg a viz Gouere
Hon boa touet le !

3

Diskan
O n'eus war va felz
Koantenn e Breizh
Vihan
Ken flourig
Ha Tinig
Merc'h ar Bod-Lann.
Nann, n'eus war va felz,
Koantenn, e Breizh
Vihan
Ken flour ha va "Bod-Lann"

Da guc'hennig vlew melen,
Bleuñvenn ar Bod-Lann
A ra din nerzh da zougen
Kañv war boan ha doan.
Ganti (ped gwech !) e sec'hen
Va dæloù c'hwerw,
Du-hont, war lein an dosenn,
Pell diouzh Landelo !

4

Te chom, Tinig va mestrez,
Ael va c'harantez.
Dit e vin gant levenez
E-doug va buhez.
Da guc'hennig vlew a harz
Ouzhin d'en em goll
Benniget e voe e-barzh
Iliz Rumengol !

Selaouit va zudigoù ; klevit ar wirionez :

Va zad 'oa mab da Darian, va mamm oa Morwregez.
E Lokeored 'z on ganet, tre war c'horre kein Vreizh -
Va c'havell a oa fichet gant tregont kroc'hen vreizh.
Da seizh vloaz e dreuzen Aon heb pont-maen na bag-treizh.

Va zad a oa bet kreñv holl, med deut e oa an oad
Da vorzaf e izili ha da skornaf e wad.
Kozh-douar 'oa ha toc'hor, moal ha laosk oa e benn :
Gant poan 'doa diwrinet, an deiz all, ur derwenn
D'ober ur vazh da vale e-barzh ar wenedenn.

Bremañ em eus dastumet e falc'h hag e vouc'hal.
Merc'hed, bugale, loened a zo din da ziwall.
Evid ober kement-se, ken glokus ha va zad
Me 'azez war ar Gador va zreiz 'goueled ar prad
Pa ziroufan, va alan a bleg haleg ar c'hoad.

Pegement a blijadur e-keid m'oañ kanfard gweñ
Em boa o lammad 'ziwar an eil roz war eben
Va fenn a stoke, 'wechoù, ouzh ur goumoulenñ zu
Hag houmañ, feuket, heb mar, a bile glaw diouzhtu
Neuze va c'hoarzh a sponte ar pagan : Tankerru !

Va zad, 'raog mond d'ar bed all 'doa lavaret d'e vab :
"Tri bezh-labour 'chom ganit (o zri diouzh an dibab)
Heb sav da gein, te boanio d'o c'has, o zri, da-benn
Kement-se, war-zouar, eo lod hag enor hor gouenn
Rag-se, me da drevelliañ abaoe dichupenn.

Ar c'hentañ tra 'm oa d'ober 'oa kompezaf Brasparz.
Goude, diveinañ Uhelgoad - Lec'h n'eus na kleuz na garzh
Ha diradena Plouie, ar baouraf tostadenn.
Ne vezo ket, va c'hredit, an didorrañ lodenn.
Pevare c'hallin kousked etre koan ha merenn ?

Jezuz a zo badezet e dour-red ar Jourdon
Ha kalz feunteunfoù, e Breizh, a zoug anw Sant Yann.
O, etienoù treuzwelus yec'hedus ha dinam
Redit, redit burzhudus, dalc'hit ar bed divlamm
Bugel dall, it da bardon ar Sklaered gant ho mamm.

Stêr goant, anwet Stêr-Arc'hant, eus ur run paour ha gouez
Hoc'h eus graet ur c'homme marzhus gwaskedet gant ar gwez
Dalc'hit mad (ha dindan guzh) henskiantoù an Drouized
Med kanit, war hent ar mor, gwerzioù-gozh ar Varzhed.
Keid ha ma redo Stêr Aon, yezh Breizh ne varwo ket.

E-pad m'emaoc'h o reñf nerzh da gement 'd eus ene
Me 'glask en em zizober diouzh raden Plouie
Va beon avad 'zo dall-poch, an dudigoù a c'hoarzh
Rag ne zispil ket dezho kaoud raden ouzh ar c'harzh
Pa chom ar park dizolo gant ed fonnus e-barzh.

Va beon dall am eus stlapet p'em eus klevet Taran
O c'hrozal a-us va fenn : "Begeor pred eo ehan :
Ar bec'h-raden diwezhañ a vo troc'het amañ
Vo da zibelliañ ur ramz ha te vezo hemañ."
Ar galez 'giz ar c'horrige 'gav e vestr er bed-mañ.

Re holl a raden war-maen ne choaz 'med ouzh ar bleiz
Bara gwizh Kolloreg 'zo c'hnekoc'h 'ged teurc'h heiz
Med grannoù blod Plouie 'zere ouzh Kouskedig
Ha "gwele paotr Landelo" a blij da Gatellig
Na re holl na re nebeud 'walc'h da yarañ brawig !

Evid gwir va zudigoù e-mesk bec'hloù-raden
Em eus dastumet 'wechoù mez e-leizh va funenn :
Aotrou Person Landelo 'doa kollet e gure
Ha me gant va bec'h-raden (hag heb gouzoud dare)
'Da 'vond d'e daol er Youdig (eff hag eben, brau-tre !)

Med Kupidon orgedus, a-grak kàer 'vond e-biou,
A hopas din : "Goustadig, pe te dorro d'az vioù !"
Ha me d'en em zisammañ ha da glask gant evezh
Neizh ar glujar darvoudet 'mesk ar raden nevez.
Tanfoeltr ! Ur Marc'hvran ez eo 'n e gichen ur boleñ !

Ar plac'hig koant 'zo boemet ar C'huro 'chom mantret
Med Kupidon ha Gwener 'us o fenn 'deus c'hoarzh
" 'Vid petra kemer glac'har ? Jezuz mab da Vari
"Mab d'ar Spered Santel 'zo graet en ur c'hoari
Foeltr-forzh ! evid Gregor VII. It prim da zimeziñ."

Ur wech all 'oa darbet din dond divragoù d'ar gêr :
Dindan ur bec'h landrammus, eneb an avel daer
Daougrommet ha skuizh-divi, me gerzhe 'n ur dermal
Pa skoillhas gaol va bragoù e-kreiz an noz du-dall
A-draf war dour St Herbod - O, biskoazh kemend-all.

Beg an tour zo diskaret. Pebezh taol divalaw
Hag ar pezh a oa gwashoc'h, va c'houign 'oa dizolo
Penaos 'oan degouezhet da goll va ibil-beuz ?
Petra 'lavaro ar sant dirag kement-se 'reuz ?
Va Spered oa gwall nec'het ha bras eo c'hoazh va c'heuz.

Disamm diouzh va bec'h-raden, med sammet va spered,
Dre va huñvre, me 'bignas hent diaes Lokeored.
Goud' ur skrabig d'am c'houez kenn, ur skrabig all d'am fenn
Me 'ziskuilhas va zro lous ha diaouleg d'am sec'henn,
Houmañ 'droc'has krenn : "Truez ! Te 'gren ! Te 'c'h eus terzhienn.

Hag hi d'ober un tantet ; ha me da ziskuilh
E ramp kàer war an oaled gant mall d'en em donmañ.
Dre ma save gwez ennon, petra 'barzh va bragoù,
A ziskrap gwazh pe washoc'h ? Salokras tudigoù
Ur c'haz raden a vefe heb mar o klask gouloù.

Evid galloud 'n em zifenn ha terrif va debren
E oan 'vond da zibrennañ gant mall, ha difeson,
Pa savas, skiltr ha taerus, diouzh gaol frank va bragoù,
Trec'hlikan ur C'hozh-Kilhog, labous fall an Ankou.
Un dro we war e c'houzoug heb pater na grasoù !

Un dro we war e c'houzoug hag al labour faro
A vezo bet ar wech-mañ rah welour e varw...
Boull-c'hurun ! Petra welan en beg al labous fall !
Va ibil-beuz aet gantañ ! O, pe me vefe dall,
M'am boa kollet va bragoù, hemañ zo da damall !

Hogen, dond a ra koun din : hemañ 'oa Gwir-Gilhog.
E glud a oa c-barzh an tour, d'an nec'h, dindan an tog.
Gwidreüsoc'h 'ged Lannig, Yann, da gouezhañ war vlod,
A begas 'barzh va ibil, risklas bragoù ar paotr
Rag-se 'z eo bet didorr-tre lamm labous St Herbod.

En ur zastum va bragoù 'm oa dastumet (gwa-me !)
Skoachet e-barzh va ribot, diouganer hon Doue !
Rag 'vid petra va zalver 'm eus goude divellet
E c'houzoug d'ar Gwir-Gilhog ? Gwashañ taol befe graet !
Taran en doa va zallet, da blotoù 'vin stlapet.

Mar-ar-yar 'c'hell faziañ - Ar Gwir-Gilhog hebken
A zispleg mad, e peb yezh, ar wirionez d'an den ;
Ha Gwiklan 'd eus embannet : "Gwalleur war an hini
A gastizo diouganer ar "Spiritu Mundi :"
Dindan an eizhved dervezh 'ranko d'e dro reudif.

Ne stlejis mul a raden war hent gouez ar Youdig
Ha war va bec'h diwezhañ 'vin ledet rouzeudig."
Begeor a vo sebelliet 'raog ar bloavezh daou vil
Ha gwac'h Poulouen 'hopo : "Kollet 'doa e ibil !"
Goulskoude ne oa ket aet ar bed-mañ dihil.


B E G E O R

Em Bretaque on n'a plus de cuir
mais on a de la boullie d'avoine

Setu pezh veg
kinniget deomp
gant re bi
Douval e
Ros por den



breunan



2 bloaz
30

Kui nuz 30

Havez an mod, zo bet Raset
plutonium gant an F.L.B.
Souset o dije gant bom-
bezennou gant an.
Maint devar n
en etzersin



Klitché Yod-WERCH

Zut, honnez
gouezho war
ar menz Bre!

SKANDAL : SONDAJ AN .I.B.I.L.

99% EUS AR VRETONED 'A
LAVAR EZ'INT SOD MIK


BEUH!

BABAAA!

PROUT



1% A VEFE SOTOCH' H C'HOAZH



NONO

DESSINS

nevez deuet
 ez maez
 (d'ar 26
 a viz even)
 Kement tra
 eo red deoic
 goud diwar-
 benn BREIZH
 AR SOTON,
 AN ARME!
 UL LEVR
 EVED HO
 VAKANSOU



NONO



az ganujenn diwezhan
 gant re ERIZ EUSA